



TORFET TAULE



COMBOT, Yann, *tacher, oajet a eur bloaz 51, guillotinet e Montroulez, d'ann 28 a viz Ebrel 1893, abalamour m'en devoa lazet, evit ho laerez, Janni Tanguy, ar verc'h, 38 vloaz, ha Jann Jaffrès, ar vam, 79 vloaz.*

Mar plij ganeoc'h va zelaouet,
Eunn torfet neve a glevfet,
Erruet e parrez Taule
Da viz Mae ugent hag eunn de.

E triouec'h-kant pevar ugent
Gant eunn daouzekved bloaz ouzpenn
Ez eo bet gret e kreiz ann noz,
Pa oa et ann dud da repos.

Eur mezhier touet euz ar vro
Hag anavezet tro-var-dro,
Evit kaout arc'hant da eva,
Diou vaouez a zeu da laza.

Diaoul ar vesventi a zeuaz,
Er mezh he vele hen tennaz,
Ha d'ezhan sur e lavare
Peleac'h kaout arc'hant ar banne.

'Barz er vraken e Lanninor,
Ar verc'h, ar vamm oa er goudor.
Kousket mad ebarz 'nho guele
Hag ann or prennet gand alc'hue.

Ar munt'rer, Combot a zavaz,
Da c'houlenn digor erruaz :
— « Digorit d'in ma'z inn enn ti,
Evid-hoc'h 'm'euz eur gefridi. »

D'ezhan Janni a lavaraz :
— « Gortozit ac'han dar varc'hoaz ;
Va mamm ha me zo 'nhor guele,
Enn-han hon lezit 'n han Doue. »

— « Hennoz eo, eme ar munt'rer,
E renkann ober va affer ;
Ha prim ho tor digorit d'in
Breman, komz ouz-hoc'h a renkinn. »

Evid he goall-eur e savaz,
Ann or d'ezhan a zigoraz,
Mes eur veach et ebarz en ti,
Netra da laret gave mui.

— « Euz va sidr ev eur verennad,
Ha d'ho ti kerzit va den mad.
Me gred eo tost d'ann hanter-noz,
Ann holl er vro zo e repoz. »

D'ezhi ar munt'rer goustadik :
— « Deud er meaz mar plij eunn tammik,
Eur ger pe zaou 'm euz da laret
Hag aoun am euz na vent klevet. »

Ar plac'h, hep sonjal drouk ebet,
Gant-han er meaz a zo bet et,

Ha neuze ziskleriaz he c'hoant :

— « Dime hennez a vank arc'hant. »

— « Ganime arc'hant na po ket,

Goude zoken am bije bet. »

'Rok oa he ger echuet mad,

Ar muntreer oa dioc'h he filat.

Eur veach ma oa Janni pilet,

Mein d'he flastra 'deuz kemeret,

Kroc'hen hag eskern a vreve

Hag a bep tu d'ezhan strinke.

P'en doa peurlazet anezhi,

Ar muntreer a zistro d'ann ti,

Morgousket a gavaz ar vamm,

Ha varn-hi a zaill enn eul lamm.

Meaz he guele 'deuz he zennet,

Hep na oa bet anavezet,

Ha didruez gand he voutou

Var he fenn e koaz toliou.

Evel me c'hlevaz c'hoaz e klemm,

Gant-hi, gemer eur gountel lemm,

Hag en he gouzoug he flantaz,

He goad diout-han a ztrinkaz.

Goude, pak fallen ar guele,

Hag enn he ginou her fourre.

Ha da c'hoalc'hi c'hoaz he zaouarn

Var ann oaled er pod-houarn.

Piou achanoc'h-hu, va zud vad,

N'en defe hirio kalounad ?

Klevet zo maget barz e Breiz

Tud ken digernez hag ar bleiz.

Eunn arbel neuze zigoraz,
Dek pez ugent lur a gavaz (1),
Ha prim ia gant-ho d'he vele
Ann arc'hant-man eo a glaske !

Kuzet a jomo he dorfet,
Den ebet n'en deuz he velet,
Ha tud ar Justis goll ho fenn
O klask dibuna ho c'hudenn.

Ar muntrer Combot, koulzkoude,
Ar pesiou aour gant-han ruille
Ma oe paket, laket er c'hloz ;
Mes var ar c'hrimm hen a zalc'h kloz.

Ne oa na test na merk ebet,
Hag he grimm o nac'he bepret
Ma oa lezet da vont d'ar ger,
Pa n'oa enn affer netra skler.

Combot losket meaz he brizon,
Gant joa a dride he galon.
Euz ar varnerien e ra goap
Ha dizamant ev chopinad.

Ann dud er vro a ziskrede
Oa Combot muntrer ann diou-ze.
Dispign a re heb labourat.
Ann dra-man sur ne ket sin vad.

Ar Justis a glask a beptu
Ha netra gant-hi ne erru :
Combot a zestumm a neve
Da c'houlenn c'hoaz ar virione.

(1) El lezvarn a zo bet hano 270 lur.

Deut da skuiza 'barz er prizon
Gant bec'h rebechou he galon :
Er groug e klaskaz ar maro,
D'ar zeitek a viz Guengolo.

Mes Doue ne bermetaz ket
E chomje eur seurt krim kuzet ;
E mare eunn den a zeuaz,
Hag ar gorden prim a droc'haz.

He dorfet neuze anzavaz
Ha d'ar Justis a lavaraz :
« Ac'hanoun, grit pez a garfet ;
Ho diou ganinn int bet lazet. »

Kasset dirak les-varn Kemper,
Tri devez epad ann affer,
Rak ann testou divar he benn
A z'oa pevar ha daou-ugent.

Mes guella test zo bet klevet,
Oa he unan doa diskuillet
En devoa lazet diou vaouez,
Evit gellout dont d'ho laerez.

Ar jureed hep koll amzer,
D'ann eil devez a viz C'houevrer,
A varn Combot da goll he benn
E Montroulez var ar blassenn.

E Montroulez, eiz-varn-ugent,
En deuz Combot lezet he benn,
Eiz varn-ugent a viz Ebrel,
Eo bet troc'het gat ar gountel !

Da bemp heur dek dioc'h ar mintin,
Eo koet he benn er c'huillotin,

Na var blassen Sant-Nicolas,
Eleac'h oa tud eunn niver bras.

Ar Billant, person ar barres
A zeske d'ezhan karantez,
Bep mare d'ezhan a boke
Ha kroaz Jezuz d'ezhan roe.

Ann oferenn en doa klevet,
He Zoue enn-hi recevet.
Evit-han mad ober pedenn,
P'eo maro ec'hiz eur c'hristen.

Piou bennak 'glevo ar verz-ma,
A dle diouall da re eva :
Rak Combot ive a gounter
Siouaz d'ezhan ! a oa mesvier !

MIKEAL QUÉINEC.

Tous droits réservés.

Komzou diveza Combot, dihunet da vont d'ar maro :

« Pardon, va Jesus benniget ! »

E gallec : « *Je demande pardon à Dieu et aux hommes :*
Trugarez Doue hag hini ann dud. »

« Perak trouc'ha va bleo pa z'er da drouc'ha va fenn ? »

O kuitaat ar prizoun : « Kenavo, introunezet, kenavo er bed
all. »



BREZEL ANN DAHOMEY, E 1892

E deuz padet pemp pe c'huec'h miz.

Ton : *Ar serjant-major.*

Me ho ped 'ta bretoned da zonet da glevet
Kana c'hoaz eur verz neve 'zo n'euz ket pell savet.
Savet eo d'ar zoudarded zo bet o vrezelli
Evid enor, mad ar vro 'barz enn Dahomey.

Eno c'hoaz, vije ha tud ha bugale,
D'enori ann doueou-faoz, d'enori ho roue,
A gantchou bras a gonter vijent gant-ho lazet,
Pe ebarz er mac'hajou evit arc'hant guerzet.

Ann dahomeyaned 're 'barz er vro ho mistri
Ha n'oant ket evit gouzav ann europiidi,
Na zoken tud all ar vro, ma vijent du gant-ho,
Euz ho ferz n'oa da c'hortoz nemet tol ar maro.

Deud oa ar Frans da skuiza, o velet ar c'hrimou,
Ann dud laeret ha lazet, guerzet er er marc'hajou,
Guerzet d'ar varc'hadourien, 'vel verzomp all loened,
Da vaga, pe d'ar c'higer, dioc'h ma vezout kavet.

Ar Frans a lavar d'ezho : miret ar c'hontrajou,
Evit respount, va fotred a grog 'nho fuzuliou,
Ha founnuz ho diskorgont var ho enebourien
Ken na gouezent goullet, lazet var ann dachenn.

Desket oent da vaneuvri gand ar prussianed,
Da denna gant kanoliou ho doa d'ezho guerzet,

Ha var droad ha var gezek e c'houient enebi
Gand ar gouraich ar vrassa dioc'h ann Europidi.

Merc'hed, goazed, a zeue, gant herr ha gant kounnar,
Betek beg ar fuzuliou, ken gouezent d'ann douar,
D'essa foeltri ar renkou demeuz hor zoudarded
Ha sounjal essoc'h gounid ma vijent kemesket.

Mes offiserien ar Frans ho anaveze mad,
P'ho gueljont hoc'h erruout a lavaraz timad :
Grit buhan ar c'helc'h potred, krogit 'nho fuzuliou,
Stankoc'h eget biskoaz, loskit gant-ho tennou.

Sellit ouz ann dud gouez-se, dispount 'rak ar maro,
Hag ho niver a zo braz, touez ha touez, c'houi gollo,
Rak gouzout a reont mad tre c'hoari gand ar zabren,
Ha larda ar c'hostesiou gant ho c'houtellazen.

Mes, c'houi jomo n'ho sao evel eur vur neve,
Ken 'nho guelfot holl lazet, pe ho tec'h adarre,
A gamejou braz neuze, c'houi iajolo var ho lerc'h
Da dud ann Dahomey didruez rafoc'h kerc'h.

Enn eur zenti evel-ze, ho deuz bet gounezet,
Ha deuz ho enebourien eunn niver braz lazet.
Ha Tud ar Frans, joaiuz, a drurekaz Doue,
Da veza roet he vennoz, eno' c'hoaz d'hon arme.

MIKEAL QUÉINEC.

E ti intanvez Gourlay, e Kemper, 19, rue ar Brovidence, e ve kavet meur a ganaouenn all c'hoaz ; evel *son ar Bigouden*, *tud iaouank Kemper*, *David guillotined e Sant-Nasaire*. Heman en deuz bet eur maro kaer dreist. A gement all a ganaouennou hon euz e brezounek var ann dud guillotined, nikun ebet anezho, na verk ar maro ken kristen hag hini David hoc'h ober he bask kenta er prizoun hag o sermoun d'ar bobl araok pignat d'ar c'huillotin.

Kemper, moulet e ti de Kerangal.